



DIWOALLOMP OUZ HITLER

« Savet gant ar barz Francis MOAL » (Alc'houéder Léon)

Ar barz ar Brezel

I

Klevet ho c'heuz mignoned
petra n'deuz great Hitler
Hor Franz, hor bro ken Karet
siouaz zo en danjer

II

An dud, a ioa dinec'het
gant «traité Locarno »
Holl vezer o lavaret
brezel ken na vezo

III

Siouaz ! E-un den-ourguilluz
eun dervez erruaz
Andraze zo malheuruz
a de dud lavaraz

IV

Ar brezel, hor beuz kollet
uguent vloaz zo dija
Ar paper zo bet skrivet
zo eaz da freuza

V

N'hor bro, beza kommandet
balamour da betra
Laraz Hitler konnaret
ne fell ket deomp beza

VI

Digasset n'deuz soudardet
berniou en Rhenanie
A c'hoaz ne vez ket nec'het
o lavaret deomp-ni

VII

Lavaret ra vouez huel
da gement zo er bed
Ne glaskan ket a vrezel
nemet ar peoc'h bepred

VIII

Klask ra lavaret deomp-ni
eur bern digressiou
Gwelloc'h enem unani
lezomp ar brezelliou

IX

Ouz e varvailhou kaer
ni na gredomp nentra
Rag gouzout a reomp Hitler
a zo gwest da beb tra

X

Na gollomp ket a fizianz
ne zomp ket c'hoaz kollet
Rag hor bro gaer a Franz
a vezo sikouret

XI

Goulennomp digant Doue
pa larom pateriou
Difen mad e vugale
ouz an holl brezelliou

XII

Ouz ar groaz eo bet staget
nag evit hor prena
Evelse c'hello miret
c'hanomp d' enem lac'ha

XIII

Diwar ho kroaz benniget
klevit hor pedennou
War Hitler, n'den milliget
taolit ho malloziou

XIV

Diskouezet ive dezhan
ezeo c'houi mestr ar bed
Taolit ho kounnar varnhan
ma vezo diskaret

XV

Neuze, an holl Francizien
greiz kalon lavaro
Ag a gano ken laouen
ar peoc'h breman vezo